

CANTIC EN ENOR AR GALON SACR HAC ADORABL EUS HOR SALVER,
Voar ton : M'ho salud , Mari.

O Calon Sacr eus va JESUS !
 Calon meurbet carantezus ,
 Pliget receo , me ho supli ,
 An desir am eus d'ho meuli.

C'hui so ar sourceen precius
 Eus ar graçou cre ha nerzus
 A recevàn a bep mare ,
 Hac a douch quement va ene.

O Calon Sacr , c'hui so un Nor
 Pehini so bepret digor
 Evit receo ar bec'herien ,
 Pa fell deo ober pinigen.

Bet on , siouaz , ð va Salver !
 Dianaoudec en ho quever ;
 Recevit va ene ingrat ,
 Distrei a ran a galon vat.

Torret ameus Lesen Doue
 Cant ha cant mil gueich em buhe :
 Muntrer infam , pec'her ingrat ,
 Treuzet emeus calon va Zat.

Dirazoc'h , Calon adorabl ,
 Me ra va Amand enorabl :
 Pardon eus va sacrilejou ,
 Pardon eus va oll sec'hejou.

Pardon ivez er ar c'hrimou ,
 Blasphemou , irreverançou ,
 Commetet gant ar Bayanet ,
 Ha gant an oll Heretiquet.

Mæs siouaz deomp-ni Christenien ,
 N'hon eus bet nemet yenien
 Evit ar garantez ardant
 A ziscuset er Sacramant.

Prosternet betec an douar
 Hor c'halon rannet gant glac'har ,
 Canomp gant ur mouez truezus ,
 Pardon , pardon , Calon Jesus.

Pastor mat , c'hui hoc'h eus clasquet
 An danvat a yoa dianquet :
 Chetu-i o goulen pardon ,
 Digorit dezi ho Galon.

Me garfe gant va goad goalc'hi
 Va maliç , va ingrateri ;
 Da viana me o gouelo
 Betec an heur eus va maro.

Ouspen-ze en hoc'h llisou
 Gant respet e rin pedennou ,
 Ha gant ur guir devotion
 Me yalo d'ar Gommunion.

D'an Offeren e zin bemde
 Gant seiz ha gant humilite ;
 Eno ec'h offrin d'ho Justiç.
 Ho Calon Sacr er Sacrifiç

Fizianç am eus da rapari
 Va maliç , va ingrateri ,
 Dre verit ho Coad precius ,
 Hac ho Calon carantezus.

Recevit ivez evit cret
 Calon ho Mam so het treuzet
 Ehars ar Groas gant seiz Cleze ,
 Dre an nerz eus he garante.

Unissomp bremàn hor moueziou ,
 Leveromp dre hor C'hanticou :
 Glozr d'ho Calon , ð va Jesus !
 Gloar d'ho Calon , Mam truez. *Amen.*

AR Breuries instituet evit enori CALON JESUS er Sacramant eus an Auter , a dle beza cals istimet
 Agant an oll Gristenien : pep-hini memes anezo , goude beza rentet d'an Dreindet Santel an devotion
 brassa , a dleffe caout un attantion particulier da enori Calon Jesus. Rac piou a alle compren peguet
 caër eo Calon Jesus , ha peguement a obligation hon eus dezà ?

Ar Galon garantezus eus hor Salver en deus e angaget da suporti quement poan en deus bet
 voar an douar , en e Vuez hac en e Bassion. Ar galon beniguet-ze en deus quement caret pep-
 hini ac'hanomp , hac a so bet quement affliget ha glac'haret evit hor pec'hejou ! Garante e galon
 evit ar Gristenien a reas dezà abars e Varo institui ar Sacramant adorabl eus an Auter , dre pehini ez
 eo presant nos ha de en hon llisou , hac en em ro da bep-hini ac'hanomp ebars ar Gommunion.

Pebez calon eta Calon Jesus , ha pe seurt enor ne verit quet er Sacramant eus an Auter ? Cousgoude
 peguement n'eo quet insultet ar Galon binniguet-ze en e Sacramant a Garante dre hon irreverançou
 hac hor sacrilejou ! an oll a oar an dra-ze , hac horror am be ous e ispliqua. Ar Breuries-mâ a so
 instituet principalamant evit rapari ar c'hrimou bras-ze , hac evit angagi da renta da Galon Jesus er
 Sacramant an Auter pep sort enort en amser da zont. An devotion-mâ a so ivez util bras d'ar Griste-
 nien a so fidel dezi ; rac dont a ra da gounit Calon Jesus hac e garante evidomp , hac hon an-
 gagi a ra hon unan da gresqui en e garante ha da bratica e vertuziou. Ouspen an dra-ze obten a ra
 deomp eleis a Indulgeançou accordet gant an llis , hac eleis a graçou evit remplissa quement poent so el
 Lesen , hac evit en em brepari guelloc'h da receo gant profit Sacramanchou. Pebez avantach eta ebars
 an devotion da Galon Jesus , pehini cousgoude ne oblich dindan pec'het ebet !

Mæs ar pez a dle rei deomp muioc'h a gouraich hac a fizianç da antren er Vreuriez-mâ ha da veza
 fidel d'e praticou , approuvet eo gant an Tad Santel ar Pap ha gant an Esquibien eus an llis , eus pere
 an darnvuya e deus-y recevet hac instituet en o Escopty. Goude un approbation quer bras ha
 quer Santel , n'ez eo permetet da nicun e dispriout na lavaret drouc anezi ; rac an Tad Santel ar
 Pap hac an Esquibien pere o deus e approuvet , o deus muioc'h a sclerigen evit tud ar betd , hac a
 vel guelloc'h evito petra so mad da sicour sempladurez ar Gristenien , ha da ober crisqui o devotion.

AN ACTOU A FEI , A ESPERANÇ HAC A GARANTE ,
var ton : M'ho salud , Mari , leun a c'hraç ; pe var ton ar C'hantic eus ar seiz Calon.

ACT A FEI.
CRedi a ràn , ð va Doue !
 CA galon hac e guirione ,
 Ar pez hoc'heus deomp revelet ,
 Ha dre an llis proposet :
 Credi a ràn , rac n'ellet quet
 Na trompla na beza tromplet.

ACT A ESPERANÇ.
 Dre veritou Jesus va Salver ,
 Digueneoc'h , va Doue , me esper
 Ebars er bed-màn ho craçou ,
 Er bed-all ho recompançou ;
 Rac ma zoc'h fidel d'ho comsou ,
 Ha leun eus a vadelezou.

ACT A GARANTE.
 M'ho car , va Doue a vir galon ,
 Dre ma zoc'h mat e pep façon ;
 C'hui , va Doue , a garin bepret
 Dreist quement tra a so er bet ;
 Abalamour deoc'h ma hente
 Eveldon a garàn ive.